

Vit diskleria «tourment vras omp bro»

Ton : « Itron Varia Bulat roet d'im sklerijenn »

1
Habitantët a Vreiz-Izel, tostait oll da glevet
Da glevet a tourmen vras, so nevez dremenet
Da glevet eur malheur bras, aruët gan omp bro
Da pezh hini so graët siwas eu toll gouel divalo.

2
Eur vro euz a herran, renet gan a Republiq
Lec'h a non réjouissait, ken-couls paour a penvik
A boe eu neubet blavegeo zo, gan o oll bolonté
A vévê brao en tud kez, barz in dougeañ Doue

3
Va spered a zo dister, evit gallout diskleria
Ar c'holl bras zo graet d'omp bro, pa oamp oll in brasa joi
Ar peoc'h ar liberte, ao breman barz in Franç
A pa sonjomp an nebeuta zo tennet warnomp vengeañ

4
Er bloavez naou a tregon, in fin miz gwengolo
Woa galvet en holl tud armé, da vont da diven o bro
Kenavo da tad a mamm, breudeur ha c'hoarezed
Ni za vont darrët da diven Franç, omp bro muan karët

5
Renka euz kuitad o zud, partia euz ar guër
Evit mont d'a combati, euz soudarded Hitler
En den man dre oll vengeañ, a dre oll combino
A euz lakat e ne ben gouarn en oll bro

6
Lakat euz en tan gonol, pevar horn euz ar bed
En dra se betek breman, na oa biskoaz gouelet
Skuillet n'euz eur goad euzus, gant y oll armeo
Vel eu diaoul divadé euz fons en nivernio

7
Partout lec'h euz tremenet, barz in touez en tud kêz
N'euz lakat poaniou bras a kals a tristedigüez
Dichadenet euz war ar bed, en oll poaniou cruel
A lakat war en douar, brezel Universel

8
Deut so gantan eu arme, dimeuz a re vrasa
Evit envahissa omp bro, a don ivê d'y drasta
En dek eus a miz mai, er bloavez daouguen
Euz lancet eu attaqu vras, tresek ar Francigen

9
En tud se eur sonj ker no halon, chom ive da resista
Euz rekat ober demi-tour, pe chom tout da laba
Didan ar houarn a dir, a gouezet warne euz c'hec'h
Lancet gan en aviono, evit gouassat ar bec'h

10
En Allemanted dirollet, kalz wassoc'h vit tud zod
Tana, drailla, a lakat dêma teuson a rog
Distrujet a euz kals, dimeuz ar herrio kêr
Lec'h a chom siwas netra, met ruin bras a miser

11
Skei a réen didrue, gant o aviono eusuz
A ober war o vassaj, kals a valorio spontus
Kals siwas eur ar bob, a euz renkat kuitad
Ho loened, ho douar, ive tout ho oll vad

12
Evit klask en tam apui, a teuson tout a vagad
Da haloupet a rienc'hou, an derro no daoulagad
Evel kals eus ar mammou, bugale touez a diou vrec'h
A houlon sikour ouz Doue, non zellet tresek c'hec'h

13
Trist meurbet va gouelet, tud a bep sort bouageo
A haloupet eus a partout, a tec'hel raok ar maro
Kar a remé tud ken fall, a tud ken didrue
A tennet kouls war tud koz, merc'hed a bugale

14
Red e oa gouelet ive, an tud vad soudardet
Hep na fusul, na canon, rei pen da ennemiet
Courajus e van meurbet, me deva ket armo
Da hallout combati, evit difen ho bro

15
A villiero gant ar bochet, a in bet dastumet
Da pere in bet gouerset, kals gwasoc'h vit loened
Kaset in pell euz ho bro, a pell dimeuz ar gêr
In tre doarn tud disure'h, da gavet naon a miser

16
Trist meurbet vije o c'halon, a sonjal bep momet
Et no groek, ho zad, ho mamm, ho amzer dremenet
Et lec'h a non labourat, gant o holl bolonte
A deva peoc'h ha plijadur, a o holl liberte

17
Kaloned bras a d'euz ive, c'hoaz ouспен a souffranz
A sonjal bep eur a bep momet, in eur ho delivranz
Gwasoc'h vit galourien, lac'het gantê tad ha mamm
In laket barz ar prison, gant ho gouarnamant

18
Biskoaz barz an histor, oa gouelet kement all
Lakat koll soudarded Franç, gouezet gant an tud fall
Kar ar Francijen trahisset gant ho mestou hudur
Zo laket gwasoc'h vit biskoaz barz an displijadur

19

Envahisset e o douar, gant an tud insolent
A laket koz ha yoank, barz o brasa tourment
Met birviken tud vad ar Franz, n'euz gallout toleri
Gouelet o brasa adversour, e ton d'ho homandi

20

Kar ar Francigen renet mad, zo gouel vrezelerien
Kat da difen ho douar, partout war an dachen
Prest bras a in darre, da gemer a armo
Evit mont ken courajus a biskoaz, tresek ar c'hombajo

21

Kar biskoaz armé Franz, brezel n'euz kollet
Pa vije gant mestou franc, a leal gouarnet
Met bean oa siwoas in omp bro, kalz a treitourerien
A oa o vrasa plijadur, trahissa ben a ben

22

C'hoant a deva da ober arrê, vel an amzer gwec'hal
Lakat ho zroad war gouk a paour kêz, ampec'h nean da
[harsal
Bean oa ive barz in Franz, kalz euz ar pennou bras
Dova hoant da lakat ho bro, arre in esclavaj

23

Evit mont da komandi, a da ober d'im lezen
A ober d'im daouliad, dirak eur drapeau gwen
Met ar Francijen unanet, n'a euz ket goulenet
Evit ma vije c'hoaz ho bro, gant en nob gouarnet

24

Ar re ze euz laket brezel, pa na oan evit gouarn
Ha chadeni ar paour kêz, da viken tre o daouarn
Ober dean gwasoc'h evit eur loen, labourat noz a de
Miser a poaniou bras, ben a ben e tam buhe

25

Breman a teusan d'ho pedi, da ober intention
Dimeuz ar noblanz, zo treitour a galon
Lakat a euz in Franz, siwas kalz a glac'har
Sort biskoaz touez a gristerien, oa gouelet war an douar

26

Digaset a d'euz in omp bro, ar bochet digalon
Evit dont d'omp maltreti, hep n'a sujet n'a raison
Lakat euz ar Francijen, da skuill kalz a derro
A kalz anet d'a souffr poaniou bras, betek heur ar maro

27

Ar maro a zo cruel, ken kri a ken kalet
Met tristoc'h c'hoaz eo ive, en den marterizet
Pez a zo graet da kalz siwas, gant ar bochet infernal
Skoet ken didrue, a siwas kalz treo all

28

Dijunted euz ar partout, tennet de ho daoulagad
Neuz a houerset an tud hudur pa velon redek ar goad
Graet a zo d'im didrue, gant servigerien Hitler
Souffr an oll poaniou cruel, a dougen eur groaz pouner

29

Met dont a ra c'hoaz en devez, fin a vo d'omp glac'har
Pa vo sinet an nevez, a peoc'h war an douar
Ar joi vras vo e omp c'halon, pa glevomp ar c'helo
A pe glevomp tintal gloir, an holl kleier omp bro

30

Delivret a omp arre, euz ar brasa poaniou
Roet d'imp omp liberte, torret omp c'hadenou
Breman n'imp a vevo arre, gant eur c'halon content
Pa eo chasséet euz omp bro, ar bochet insolent

31

Goude bean gantê occupet pevar korn ar hed
A anz rekaf return da gêr, vel eur vanden chass foudet
Goul on p breman gras Deus, vit ma vel omp birviken
En tud treitour euz en Allemagne, e ton da ober d'im lezen

32

Setu aze ma zud vad, tout a m'euz dac'h diskleriet
A piou penak a gav, faut euz ma ombjou, me obet d'im
Me parlanto gant en den se, ya in bep fesson [lâret
Koulz in galek vel brezoneck, partout gan ar raison.

Y. CESSON.

Prix : 10 francs.

(Toutes les reproductions sont interdites)

